

F R A G I L I T E A N D U D Y A O U A N C

Var eun ton rigolo

Ni boa eur hoguic yaouanc oa dunam guenemp-ni
 Oo commanset do gana, mes brema na ra mui
 Eun noves goude e goan, o tont eur zonj ne ben
 Me a renk mont en nos man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyat var ar mes
 Da glask e merh Perina, digant a intanves
 Pe guir on hanvet coguik, gant oll dud ar vroma
 Me garfe caout eur boles, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an ano, a goguie vit partaj
 Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj
 Perin merh an intanves, hounes a so dam grad
 Kanneres a danserres, brillant e daou lagad.

Bonsoir dehu intanves, setu me deut expres
 Da glosk o merh Perina, da hanter tiegues
 Rac qeit a ma vemp yaouanc, or bo contantamant
 A plujadur a sambles, ep chagrin na tourmant.

Ma merh me so abredic eur blaves hoas
 Mar de contant ar buguel, me na ranquet a gaz
 Kousquet eo ene guele, er pen dan traon a ti
 Monet a ran de havet, da houlent diganti.

Arsa ma merh emezi, na din me levered
 A houi so contant paouric, da gavet eur pried
 Berruh cafet an amser, bremen epad an any
 A toma doh o quele, goude pa zeui ar goanv.

O ya va mam emezi, certain me so contant
 Demeus a greis ma halon, da gaout eur pot yaouanc
 Mar dei caner a dansser, ac eur pot delicad
 Neuse a meus esperans, d'ober tiegues mad.

Neuse ar pot yaouanc man, a so jaoüs a guie
 Ac a sistroas da gaer, hed an hend neur gane
 Penos eta yan goguic, te so bet o vale
 Eun tam mout diversat, o hanons domp an de.

Neuse sistroas ouzin, gant eun air da hoarzin
 Mar de guir on me coguic, houi so eur louar fin
 Houfe pefe eur vadeles da vont bremen ractal
 Da anons ma dimesi, betec ar presbital.

Ar hoars var ma musellou, pa non quet vit miret
 Ya va mignon emesan, me reï se na requet
 Monet a ran evidoh, betec ar presbital
 Rac merh an intanves, evidoh ne quet fal.

Bonjour doh autrou person, me a so deut gant pres
 Da hout a houi zimefe, eur hoc ac eur boles
 Pere o deus desir bras, da vea unisset
 Eun tamic a so deja, o deus enim choaset.

Neuse a respondas din, ive neur vous hoarzin
 Deus aman ebars er zal, kemer eur bane guin
 Eroet ezout bepred, eun tamic de quevyer
 A teus clevet jamais, ve dimeset ar yer.

Excusit autrou person, mar meus drouc parlantet
 Malheur eo dandud yaouanc, pere so leshanvet
 A re a barlantan doh, a so daou zen yaouanc
 A zezir bet unisset, velt diou galon gontant.

A re a barlantan doh, so mal a fumelen
 A zevir bea stagnet, gant ar memes chaden
 Unan aue trivelh vla, an hani all pemze
 Zo pel so bras en hirvoud, hortos be dimeset.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont dan illis
 A me o interrojo, var dern a hatekis
 Pa orgoulet digante, a na ouient netra
 Demeus ar sacramanchou, a re brinsipalla.

Filet dar guer bugale, evit eur bloa pe daou
 Da hortos ma pot desquet, dern arn sacramanchou
 Neuse zavas e siou scoa, me a gret a zonje
 Eun drues eo emesan, dimesi bugale.

Veuse a zeuont dar guer, o daou eneur ouela
 Ret a vo demp emeso, donet da studia
 Ret a vo demp studia. cols an de ac en nos
 Mar ouefomp quet re neve, ni zescoa re gos.

Tri pe bevar mis goude, a ya an intanves
 Da gaout an autrou person, da lard dan tol eves
 Rac va merh so languissant, eun tamic so deja
 Seul vui avans e hlenvet, ya bepred var vella.

Setu an autrou person, desi neus lavaret
 Lavarit deso dont hoas, ac a vont dimeset
 Houi a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person
 A oar nem convertissa, ep mont dar mission

Ar memes tra ezint bet, dimed ac eureujet
 Gras da vea eürus, keit a vont var er bed
 Bonheur a zeziromp de, keit a von er bed ma
 A goude pa vont maro, er gloar de jouissa.

FIN
 CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC Yves